

GWERZ NEVE ENN ENOR DA ZANT WELTAS

Gweltas, ganet e Bro-Zoz, er bla 494, a dreuzaz abred ar mor evit dont e Breiz-Izel, gant zant Kado he vignon, d'ober pinijenn ha da brezek ann Aviel. Goude bezan zavet eunn abati e gourenezen Rhuis, tost d'ar ger a Wened, e teuaz da chomm war lez ar Blavez hag aliez e pigne hed ann dour, bete meneiou Kerne, da skuill sklerijenn ar gwir Fe e mesk hon tud koz, pere, evit ann darn vrasan, a oa c'hoaz paianet. Enoret a ve ar Zant braz-man, madoberour hon bro, e meur a barrez, e Laniscat, e Magor, e Carnot, e Tremargat, etc. Ober a rer he ouell ann 29 a viz Gwenver, ha kalz a c'hrasou a obtener dre he zaouarn, evit ann dud hag al loenet.

WAR DON : *Kristenien ann Armorik....*

DISKAN

D'ac'h, o Kalon hon Zalver, trugare da vikenn,
 Da vezan roet d'imp zent da brezeg ho lezenn :
 Da vezan roet Gweltas, evit tad d'hon zud koz,
 Ma-z-imp ganthan ha gante, eunn de d'ar Baradoz.

I

Boblou hon bro a gerze kreiz ann devalijenn,
 Digarante ho c'halon, divadeiant ho fenn ;
 Neuze, vel eunn heol grouezuz, e paraz war Arvor
 Gweltas, ar Groaz enn he zorn, o tonet dreist ar mor.

II

Bep pa doste, dirak-han, e sponte ann diaoulou,
Mouéjou skrijuz a c'harme pad ann noz er c'hoajou ;
Ann oll a oa stravillet, Gweltas tamm na zemple,
Dinec'h e vev hag e varv neb en deuz gras Doue.

III

War ojou Rhuis, da gentan, dre he gomz hag he skouer,
E c'honeaz eneou da Jezuz hon Zalver ;
Goude, hed ha hed Blavez, dre Wened ha Kerne,
Warlec'h ann danvad kollet, pastor mad, e rede.

IV

Ar c'hleze hag ar gontel a goueze d'ann douar,
Pa ziskoe d'ar muntret he Vestr war ar C'halvar :
Hag hon tadou a gredaz, o klevet anezhan,
E tleent karet Doue, ha karet ho nissan.

V

Pa chome euz he gomjou sperejou kaledet,
Kentoc'h eget ho lezel liammet enn ho fec'het,
Ar zant, karget a fians, evel Jezuz gwechall,
A re bue d'ar re varv, sklerijenn d'ar re dall.

VI

Hen eo a lake Komor n'he gastel da grenan,
Hen a gelenne Tremeur hag he vamm Tréphinan,
Ho c'helenne da bedi, da zenti ouz Doue,
Hep kavet aoun ouz ann dud, nag ouz beg ar c'hleze.

VII

A bep tu vije zavet ilizou da bedi,
A bep tu vije klevet bennoz ha meuleudi :
Euz a Vreiz-Izel neuze, o kaeran amzeriou !
Zent hag elez a vanden, a ninje d'ann envou.

VIII

Hon traouiennou neuz zonet gant he vouez pa gomze,
War hon rec'hier eo pignet ha war lein ar mene ;
Nag a wech he c'houezadur, kijet gant he zaelou,
A c'hlebaz hon lanneier, pa glaske eneoù !

IX

Enn he vuez en deuz bet karet ar Vretonet ;
Ac'houdevez, hi d'ho zro, ho deuz hen enoret :
Ken madelezuz gwechall, madelézuz eo c'hoaz ;
He galon zo 'n hon c'henver ken tener ha biskoaz.

X

Zant Weltas, mignon Doue, pa-z-oc'h ken gallouduz,
Hag evit ar Vretonet, pa-z-oc'h trugarezuz,
E kredomp zewel hon mouez da c'houlenn ho sikour,
Goann omp, ziouaz ! er brezel, krenv eo hon enebour.

XI

Klenvejou oc'h euz iac'heet dre galz a vurzudou,
Ouz kounar, ouz follante, ec'h anavet louzou :
Dalc'het nerzuz hon divrec'h, ha pelleit pep goalenn
Deuz hon loenet, hon farkou : deurveet ho difenn.

XII

Dreist-oll, skarzet euz hon touez ar c'hlenvejou direiz,
Oc'h euz skarzet a ene hon tadou koz e Breiz !
Pebez glac'har, mar teufemp, evel ar baïanet,
Da blegan dirak Satan hon fennou badeet !

XIII


Poan vraz hon euz o tiwall a zroug hon bugale,
Iudall a ra c'hoaz ann diaoul euzuz eneb dezhe,
Diredet, o, diredet, miret-he da beuri,
He, oanedigou Jezuz, kreiz ar bleuniou lili !

XIV

O zant Weltas, hon fatron, gant fiars ho pedomp,
Deuz ho tron er Baradoz, tolet eur zell war-n-omp :
Na lezet ket eur c'hristen da vervel enn hon bro,
Hep na vefe bev ar c'hras ennhan war he varo !

EVEL-SE BEZET GRET.

Mr Gitterel



Imprimatur cum laude.

Brioci, die 25^a Januarii 1882.

† AUGUSTINUS.